

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

35. KLOAREK ROSKO

Eur menik glaz zo e penn va zi
 d'ar gloer iaouank da studi.
 triouec'h douz kloarek am euz bet
 hag ho zriouac'h int beleget.
 Philip Olier, ann diveza,
 a laka va c'haloun da ranna.

Philip Olier ma n'em c'harjac'h
 enn ho kaloun nag en nep leac'h
 Pa zea philip Olier d'an urzou
 /ec'h azez Janned/° war he zreuzou. ° a-is: Janned azez
 na da ourla mouchouerou
 hag evit sec'ha he daelou : ° a-us: e tistrofac'h
 - Philip Olier, distroit° enn dro
 beleien a-walc'h a zo er vro.

Philip Olier a zo beleget
 va c'haloun keaz a zo rannet.
 - Philip Olier ma n'em c'harjac'h
 enn ho kaloun nag e nep leac'h,
 ne lakafac'h ket va mouchouer
 da c'holei ar c'halir war ann aoter.
 - Ne ket fae warnoc'h, Janned, a rann,
 da zervicha Doue her lakaan,
 da zervicha Doue hag ann dreinded
 da c'holei ar c'halir benniget.
 Azalek ann aoter beteg ann or zal
 klever kaloun Janned o strakal,
 o velet he muia karet
 o vont da laret ann ofern bred.
 pa zea Philip Olier tro ann iliz
 e krog Janned enn he zoupiliz.
 - Filip Olier, distroit ouzin
 pec'hi a rid abalamour d'in.
 - Ma karjac'h, Jannet, beza lavaret
 e vije ho kaloun rannet
 vijenn eat da Roum da zizakri
 evit dont d'ar gear d'hoc'h eureuji.
 Na pedo o tont war ann hent braz

- 98 -

ec'h erruaz gant-han eunn den koz braz.
 ha diout han e c'houlennaz :
 - ha bonjour /dehoc'h/den koz a ia d'ar vro:
 Petra zo a nevez e Rosko
 ma sounn ar c'hleier tro war dro ?
 - Brava plac'h iacuank zo er vro
 a anterrer hirio e Rosko,
 eur belek iacuank koaz^o euz he maro ° lenn : kaoz
 Philip Olier eo he hano.
 Philip Olier en devez klevet
 penn he varc'h en deuz distroet,
 ha da vered Rosko ez eo deuet.
 E Rosko pa zeo em gavet
 d'ann iliz raktal ez eo eet.
 p'edo o vont etal ar vered
 kornik al liser en deuz savet,
 eur vousc'hoarzin outhan en deuz gret.
 Da gaout ann aoter ez eo bet eet
 ha kaloun filip Olier zo rannet.
 ann dud kaon ho deuz lavaret :
 - pa n'int bet ho daou enn eur gwelead
 ez aint ho daou enn eur besiad,
 ez aint ho daou enn eur bez doun
 Doue ra bardouno d'ann anaoun.

vvvvvv

Keñveriañ An Uhel, Gwerziou I, p. 406 : Janet ar
Iudek, ha Penwern niv. 118 : Philipp Olier.